



PEDEN AR PRISONIER

Son nevez
savet gant ar barz Kastellad Francis Moal
(Alc'houeder Leon)
great prisonier d'an 19 a viz Even 1940

I

Diouz ar mintin, kerkent ma vez savet,
Ar soudard kristen zo prisonier,
A greiz e galon c'heller e glevet,
Goustadig e c'hober eur bater.

Diskan :

O va Doue, kemerit truez
A selaout hor pedennou,
Evidomp pebez tristedigez,
Hor sikourit en hor poaniou,
Grit ma c'hechuo ar brezel spountuz,
Klevit klemmou ho pugale,
Grit ma vezor c'hoaz eüruz,
A roit deomp hor liberte.

II

Bemdez, pa gemeromp hor labouriou,
Hor sonj a nij warzug Breiz-Izel,
Lamet a ra neuze hor c'halonou,
Sonjal peur e c'hechuo ar brezel. (Diskan)

III

Sonjal reomp en hor tud muilha karet,
N'hor mamm, n'hor tad, pried, 5bugaligou,
En hor breudeur, ag en hor c'hoarezet,
Enno ni sonj en hor pedennou (Diskan)

IV

Sonjal reomp ive, re d'euz hor gwerzet,
Ho zro a erruo eun dervez,
Malloz da gement en deuz hor trec'het,
'Outho ni a vezo didruez. (Diskan)

V

Eurusamant, ni a gemer fizianz,
Rag gouzout reomp vezo gwelet c'hoaz
Hor bro garet, hor bro gaer a Franz,
C'henem sevel huelloc'h vit biskoaz(Diskan)

(Reproduction interdite.) Francis MOAL.

Deux commencer les 2 dernières lignes
infinies la dernière

de zion man am feyn
great pa zebon prisoner
~~the~~ camp Bremsen e Kichen
Sant Brie